

YF_0137_Ar gemenerez yaouank

Ur gemenerez yaouank a zo en Lannuon a zo en Lannuon
Deus gwraet rochedo newez d'an Aotrou ar Baron
Des pingnes, des mingnes, Des pingnes mingneron

Pa oa gwraet ar rochedo, ha prest da gas d'ar ger (2x)
He a rankontr ur lakes hag ur palefrinier

Digoret an norajo, digoret ane' frank
'man a'i ar gemenerez an Aotrou 'n ar gambr

Pa oa ar gemenerez gant an Aotrou 'n ar gambr
E deva gwin da evan en ur tassen gant arc'hant

Pa oa ar gemenerez gant an Atrou 'n sal
E deva gwin da evan en ur werenn gristal

Pa deue ar gemenerez na dre ar vins d'an traon
Oa leuniet he godello a grampouz hag ar c'hraou

Pa oa ar gemenerez vale dre ar pave
Oa karget de'i he vaner a verseri newez

Karget oa de'i he vaner a verseri newez
Ken a oa deut da sonjal: petra signifi se ?